

300

Alger
gemeret gant ar Fransichen
ar 5 a vis quere, er bloaves 1830.

(351, suite)

Van ton: Adieu, Pontres.

Salud d'am bro, salud d'ar Franç, merc'h - ena eus ar victor!
Muya caret ar Brovidanç, leun a c'hloar hag a enor!
Dindan gallout ar fleurdilis c'hui vezo victorius;
Charles, mab ena an ilis, h'ey ho rento glorius.

Eur bobl douget a beb amser vel ini var an douar,
E voa ar bohl eus a Alger, meurbet cruel ha barbar.
Adversour bras ar Gristenaich, eur forban dreist musur!
Eus peb christen en eo lavaich loen furius dreist natur.

Pemp cant vloa tremenet a zo aboue ma voe da quenta
Tentet da gemeret ho bro evit dont da zilivra
Peb pobl christen eus a bouvoar an oll Algerianet,
Nation abet var an douar ne deussan biscoas gallet.

(352)

Charles pemp, Roue eus ar Spagn, prinç bras ha meurbet vaillant,
Impalaer en Alamagn, gant eur arme puissant;
Ar Rouane eus ar Sozon, ha calz a Buissançon
A rang tē'het dre abandon, en despet d'ho oll armou.

Nerius, crēn dre forbaneres voa Alger, ar vro gruel;
Dre pemp cant vloa a stourmeres, a orguil meurbet huell,
Ey deus prouvet d'ar bed antier e gallout, e fuissanç,
E soo e fey dre e c'hartier, gant ar brassa aroganç.

Pavillon Franç bet insultet gant ar Mestr bras a Alger,
Hor Roue ey eus discleriet brezel desan, eb quarter,
Quey dre vor, ha quey dre zouar: ma parti hon armeou,
Da benissa an Dey (1) barbar demeus e insolancou.

(1). - Gouverner.

Bindan ar Princet a Bourbon, dre vrezellou legitim,
An triomp emeus ar raeson a zorti eus an abim.
Peoc'h a clasont dre ar bresel, d'ar bopl bonheur ha comere,
Henor ar Franç da quenderhell, rei da anaout e oll nerz.

(353)
Reservet voa da Charles deg, pel-ze gant ar Brovidanç,
Stouat pen Alger en e bleg, dirag ar Pavillon Franç.
E teir sizun, ar Fransichen, dre ar c'haera vaillantis,
A blant drapo ar gristenien, ornet eus ar fleurdelis.

Ar General, Comt a Bourmon, er pen emeus e arme,
A barti emeus a Doulon gant Admiral Dupere;
Dirac Alger en eur rentont, disquey a rer en douar
Eb dougea d'ar vro divergont na d'e armoù barbar.

Arme ar Franç, vel ar gurun, a que var ar barbaret,
Diaseet var ar fortun, e trast he enemiet;
Quemer a ra ho zatennou, ho loënet hag ho bevanç;
An Turquet hag o oll armou, nespet d'ho oll resistanç.

Avanç a ra ar Fransichen en bro n' Algerianet;
Combat reont e peb tachen, distruch reont tud ha loënet;
Netra na ell ersel oute, vaillant int e peb feçon,
Ho fizianç a so en Doue; courajus int a galon.

Enuout a reont e ber amser dirac ar quer gabital;
Quemeret a reont Alger, he habitantët brutal;
He bro hag he oll armoù, he madou, he oll voyen,
Penzec cant eus a ganoniu ha daouzec lest a linen.

(354)
Niver bras a vagasennou, carguet a binvidiguez;
Niver bras a bep seurt armou, quemeret e ho zies,
Teinsorion en aour, en arhant, caret gant ar Fransichen,
Forbanet gant eur bobl mechant var an oll bopliou christen.

Forcet Alger d'en em renta gant ar General a Franç,
Ar soign a quemer da guenta ez eo ar prompt dilivranç
Eus an esclavourien gristen, staquet e quis d'ar loënet,
En doufezion, dre eur chaden, a boe ma voant quemeret.

Alger, leun a superbite, tremenet eo da amser!

302

Na zouger mui da vanité, da cruote, da coler ;
 Ker superb, cruel ha barbar, effacet da virriq'en
 Eus reng tirantët an douar, breman out d'ar Fransichen !

C'huoc'h-uguen leo dimeus a vro, tremen pemp cant mil barbar,
 Gant hon arme, breman a zo quemeret var ho douar.
 Eur vro gaer goneet d'ar Franç, hag a vo en e profit,
 Presant laer eus ar Brovidanç, goneet dre e merit.

Honor d'ar General Bourmon, hag enor bras de arme !
 D'ar vartolodet a galon, d'an Admiral Dupere !
 Oll ho deves bet combatet vel leonet furius ;
 Hint eo ho d'eus hon dilivret eus eur bopl goal dangerous.

Honor d'ar Roue eus ar Franç ! honor d'an oll Fransichen !
 Trugarecaomp ar Brovidanç, so souten ar gristenien :
 Ebt n'an deus nep seurt pouvoar capabl da reussida,
 Puissanç abet var an douar na ell oute resista. (355)

An hini zalc'h, dre e buissanç, destin ar rouantelez,
 A voezo preservi ar Franç, vel m'en deus gret alies,
 Eus malic he adversourien, daouesi ma clasqfent ober ;
 Victor a vo d'ar gristenien, ma clasqfent oute offer.

O c'houi ! Mestr an oll Rouane, pini oc'h eus teurveet
 Rei ar gallout bras d'hon arme var he oll enemiet ;
 Conservit demp-ni hor Roue, hac ar faemill a Bourbon ;
 Conservit atao ho pugale hag ar quir Religion. Fin.

Gret gant an Otrou Le Coat, commisser poliç
 e Montroulez, 16 Gouere 1830.

(Vol. VII, p. 351-355.)
 strophes non numérotées.